

**KIS-653**—Hanc'herieg an arvestoù V —  
Gl.Sz. **chrominance**

(YBAN ha GM – 25 11 99 dre Internet)

[YBAN] Ur goulenn a-zivout ar Sz. **chrominance**. Emañ GE o labourat war *Geriadur ar mediaoù*, hag ezhomm zo eus da sklerijenn. Setu an despizadur kaset din :

“Énergie lumineuse correspondant à la représentation des couleurs dans les systèmes de décomposition d'images, vidéo en particulier.” (*Dict. des Médias*, dir. Francis BALLE, Larousse-Bordas, 1998, p. 42.)

Ur c'houlakadenn : *chrominance* = \**chromoluminance* ? Setu bremañ despizadur an *Oxford Dictionary* :

“Difference in colour quality, measured with respect to a reference colour of equal brightness [f. Gk. *khroma* colour, after *luminance*].”


Ar c'hinnig betek-henn : Br. *livsked*.

[GM] Setu pezh a lennan a-zivout Sz. **chrominance** e *The Physics of Colour* gant Kurt NASSAU (a oa gwechall o labourat e Bell Labs, Murray Hill), p. 363 er rannbennad **COLOR TELEVISION** :

“The camera records three signals in *color television*, corresponding to the red, green and blue intensities of the observed scene. These colors are analogous to the three sets of cones of the eye as described in Chapter 1 and earlier in this chapter. The three signals are combined as shown in fig 14-7 for a *luminance* or total brightness signal, which is all that is utilized when the image is displayed on a monochromatic set. The red-to-green and green-to-blue signal ratios are also determined and form the two *chrominance* signals, which complete the three signals necessary and sufficient for full color reproduction.”

Alese e tennan ez eo ar Sz. **chrominance** ur feur etre read daou arhent unliv. En hentenn luniet gant NASSAU e vez boneget ar stlenn war al liv gant teir elfenn :

- 1) ar read luc'hel hollek dre unanenn c'horread  $W \cdot m^{-2} \cdot sr^{-1}$  : *luminance* ;
- 2) feur ar readoù ruz ha gwer : *chrominance* R/Gw ;
- 3) feur ar readoù gwer ha glas : *chrominance* Gw/Gl.



(YBAN da GE – 28 11 99) :

*Two chrominance signals ha chrominance, eme an amerikaneg. E se e c'haller stadañ ez eo SzAm. **chrominance** ur feur etre read daou arhent pe etre daou sked. Un tammig evel Br. *douester* a zo keñver daou dolzder ec'honel. A-benn ar fin e ve dav kavout un adanv o taveiñ da sked bras pe vrasoc'h ul liv ha deverañ alese un *X-ter* bennak. Gant *skedus* hor befe *skeduster*, a vir an dave da Br. *sked*, Sz. *luminance*. An *douester* zo muzul ar c'heñver etre tolz ec'honel un danvezenn ouzh hini an dour (an doues pe zouesoc'h), evel ma'z eo ar Br. **skeduster** g. **-ioù** muzul ar c'heñver etre sked ul liv ouzh hini ul liv dave (ar skedus pe skedusoc'h).*

(GE da YBAN – 06 08 00)

Ar **C** zo ur c'heñver hep ment enta. Gwell luniañ e anvad nann dre an hentenn jedoniell ( $A = BK^{-1} \oslash B\text{-der } K\text{-el}$ ) met dre hent an dec'heriañ dareuladel. Anv zo a geñver etre readoù luc'h an tri liv. Dre zareulad, a-did enta evit un darn, e kinnigan kenstrollañ Br. *liv* ha *tez* : **livdez** g. Notomp Kb. *lliwdes* "bright-colored".